





LIVE 2
ADALEK
7 VLOAZ

UN TAMM BIHAN EUS BREIZH



MIRDI BREIZHEK AN DEPARTAMANT
KEMPER



Donemat e mirdi breizhek an departamant, ma anv zo Maëlle.

Ambroug a ran ma mignon Arthur, hemañ eo ar wech kentañ dezhañ dont amañ.

Plijet bras on gant al lec'h-mañ, graet e vez anaoudegezh gant istor Breizh, eus ar Ragistor betek bremañ.

An oberennoù zo bresk-tre, ret e vo dit diwall neuze pa vi o vont dre ar salioù :

- Arabat mont re dost d'an oberennoù.
- Arabat touchañ d'an oberennoù.
- Arabat diskouez un dra bennak gant da greion.

Met er mirdi e c'hallez ivez :

- kaout plijadur, sellet en-dro dit
- Hunvreal, pourmen, distreiñ
- Sevel goulvennoù - Chom hep gweladenniñ pep tra



Enklask KEVRIN ER PALEZ

En noz e oa bet adarre un dudenn gevrinus oc'h esaeañ laerezh penn sant Tremeur !

Kas an enklask da benn ha klas gouzout piv eo ar farser bihan...

Chañs vat dit, ha dreist-holl chom war evezh !




Tout ar c'hoarioù n'int ket liammet gant an enklask, n'eus ken nemet ar re gant skeudenn sant Tremeur.

Respondoù al levrig a c'haller kavout e degemer ar mirdi.

Mirdi breizhek an departamant zo staliet e palez kozh an eskibien :
palez Eskibien Kemper.


Sell mat ouzh ar savadur ha kelc'h an 3 respont mat :

→ Ar palez en deus un tres e stumm :



→ Ar gazel m'emañ mont e-barzh ar mirdi zo eus :
XV^{vet} kantved XVII^{vet} kantved


→ An tour en deus meur a brenestr gant ur warg :



Enklask
KEVRIN ER PALEZ


Pet prenestr n'int ket bet stoufet o deus ur warg damblaen-begek ?

_____ *Skriv ar sifr er bajenn 15.*



Er sal, sell mat ouzh an traoù amañ dindan.
Bez ez eus anezho hiziv c'hoazh met en ur stumm un
tammig disheñvel...


Liamm pep traezenn gozh gant he c'hoar gevell hiziv.



Mat da c'houzout !

*Un arkeologour zo un den a glask traoù pe roudoù kozh-kozh en ur doulañ an douar pe er mor.
A-drugarez d'e labour e ouzomp penaos e veve mab-Den !*

HENAMZER



Ar pavezadur e-kreiz ar sal zo leur kibelldioù un ti kozh galian-ha-roman.

2000 bloaz zo e kase ar Romaned aer tomm dindan al leur-di evit tommañ dour ar c'hibelldioù : **an tommerzh dre gav-tommañ eo.**


Sell mat ouzh ar vozaikenn-mañ ha kelc'h amañ dindan gant peseurt danvez eo bet savet :



Klask al lestr ruz gant tresoù brezelour ha sav e dresadenn en-dro e-kichen.




KRENNAMZER




An togennoù a vez kinklet alies. Sell ouzh ar re a vez kinniget amañ. Gouzout a ri adkavout al loened treset ?

Kelc'h ar respontoù mat amañ dindan.



Sell ouzh an 10 ardamez amañ dindan ha kelc'h ar 5 a welez er sal...




Mat da c'houzout !

Un ardamez zo un arouez. Da gentañ-penn e oa evit anavezout ur familh eus an noblañs. Hiziv an deiz e c'hell un ardamez bezañ arouez ur gêriadenn, un departamant, ur rannvro, ur vro pe n'eus forzh kumuniezh all c'hoazh.

Ar werenn-livet

Aozet e vez ar gwerennoù-livet diwar strollañ meur a damm gwer livet kenetrezo. Kinklañ a reont an ilizoù. Sell mat ouzh ar werenn-livet-mañ ha ro he livioù dezhi en-dro pa oant aet da get.



Mat da c'houzout !

Ar werenn-livet he deus ar stil gotek flammek rak stummoù al lodenn a-us a denn da flammennoù.


1492

Dizoloet Amerika gant Kristof Koulm.

Kendalc'het e veze da sevel ilizoù ha lakaet e veze enno delwennoù sent evel ar re a c'hellez gwelet er sal-mañ er mirdi.

Pep sant pe santez a vez taolennet gant un elfenn pe meur a hini liammet gant e istor pe e berzhioù : e arouezoù a vez graet anezho.

Clask an tudennoù er sal ha liamm anezho ouzh o arouezoù mat.



Mat da c'houzout !

Ur sant pe ur santez zo un den ha ne ra nemet oberoù mat. Evit ar Gristenien ez eo ar sent hag ar santezed ul liamm etre Mab-den ha Doue. Evit goulenn ganto bezañ gwarezet e c'haller pediñ anezho pe kinnig profoù dezho.

Deomp bremañ d'an estaj kentañ.

MAREVEZH KEMPRED

MAREVEZH KEMPRED

1789

An Dispac'h bras



Enklask - KEVRIN ER PALEZ

Emaout bremañ e lojeiz palez kozh an Eskibien. Sell na pegen brav eo ar parked giz Versailles. Pet pezh zo el lojeiz-mañ ?

_____ Skiv da respont er bajenn 15.



A

Sae vadeziant




B

Manteled kañv



C

Gwiskamant lidoù evit ar baotred



F

1^{añ} gwiskamant evit ar baotred



Hiziv

Ar gwiskamant hengounel zo ur gwir gartenn-anv. Reiñ a ra tro da c'houzout ma'z eo euredet un den, ma'z eo pinvidik, e pelec'h emañ o chom...

Klask an dilhad-se er armeloù-gwer. Lenn ar c'hartelloù (panell vihan gant titouroù) hag e ouezi eus peseurt bro e teuont.

Evit pep bir war ar gartenn, skriv al lizherenn a glot gant pep gwiskamant.



E

Gwiskamant lidoù evit ar merc'hed



D

Gwiskamant paskerez

Mat da c'houzout !

Breizh zo kalz broioù bihan disheñvel enni. An tiriadoù eo ha pep hini en deus ur c'hiz hag hengounioù a-ziforc'h mat.

MAREVEZH KEMPRED

MAREVEZH KEMPRED

1789

An Dispac'h bras

Hiziv



Sell mat ouzh ar poltredoù ouzh ar mogerioù, ha liamm pep tudenn gant he obererezh d'ar poent-se.



O kemer dour eus ar feunteun



Gwerzhouez avaloù



E marc'had al listri



Enklask – KEVRIN ER PALEZ

Evit mont d'ar salioù 8 ha 9 e treuzez lodenn goshañ ar mirdi : an tour hag e viñs. Lakaet e oa bet da sevel gant ar familh Roc'han. O ardamez a c'hoarvez eus div vaktlenn (romboù bihan).


Pet a c'hellez kontañ evit ar c'houlz-se ? _____

(Psst... Sell en nec'h da welet anezho)




Klask an arrebeuri breizhek-mañ. Amañ e veze pep a hini gant an holl dud 100 vloaz zo c'hoazh ! Met da betra e talvezeta ?
Skriv ar respont mat.





Sell en-dro dit ha klask an arrebeuri *Seiz Breur*.

Liamm ar poentoù kenetrezo evit lakaat war wel ur c'hinkladur a zo war unan anezho.



War peseurt doare arrebeuri e weler an dizain-mañ ? _____



Kêr Gemper zo brudet-mat evit he feilhañs.
Setu penaos e vez graet :

- 1  **Glebiet e vez an douar**
- 2  **Roet e vez ur stumm bennak dezhañ**
- 3  **Lezet e vez da sec'hiñ**
- 4  **Lakaet e vez da boazhañ ur wech kentañ**
- 5  **Kinklet e vez gant livaj**
- 6  **Lakaet e vez da boazhañ un eil gwech hag echu eo !**



En unan an armelioù-gwer e c'hallez gwelet an delwenn-mañ eus sant Kaourintin, sant paeron kêr Gemper eo. Petra e oa e vicher er ^{VI}^{vet} kantved ?

Kaourintin a oa _____ Kemper.

(Psst... skrivet eo ar respont war ar gartell)

Klask ar Roue Grallon en-dro war e varc'h o c'haloupat war an douar. Tec'hout a ra eus e geoded beuzet gant an dourioù, rak an diaoul en deus digoret dor ar gêr bet savet e-kreiz ar mor.

Un den a zo kouezhet a-dreñv dezhañ, met piv eo da'z soñj ?
Kelc'h ar respont mat.



E varc'h, Dahud he deus roet alc'hwezioù kêr d'an diaoul.

E voereb, Jozefin ne oar ket mont war varc'h.

KEVRIN ER PALEZ RESPONTOÙ D'AN ENKLASK

En noz en doa eseaet un dudenn gevrinus laerezh penn sant Tremeur adarre !



Evit gouzout piv eo ar farser kevrinus, kae betek penn krec'h lodenn goshañ ar mirdi.

Eno e kavi ur c'houfr prenet gant ur c'hadranas hag ar respont ennañ....

Ar c'hod-kuzh evit digeriñ ar c'houfr zo :

- An niver a brinistri gant gwaregoù damblaen-begek n'int ket stoufet :

- An niver a bezhioù a zo e lojeiz an eskibien :

- An niver a vaklennoù war ardamez ar Roc'haned :

- An niver a dreustoù war an doubl koad e stumm ur balmezenn e penn krec'h an tour :

Gra sammad an daou sifr-mañ a-benn kaout niverenn

diwezhañ ar c'hod : + =

Skriv ar c'hod amañ :



Amañ, tres an dra zo plijet
ar muiañ dit er mirdi !



Heuilhit ac'hanomp ha kendivizit war ho skiant-prenet
war ar rouedadoù :

 [musee.departemental.breton](https://www.facebook.com/musee.departemental.breton)

 [musee.breton](https://www.instagram.com/musee.breton)



Moullerezh Kuzul-departamant Penn-ar-Bed
© Empennet gant : Mirdi breizhek an departamant 2023
Kaset da benn gant : Traductiongrafik
Imprimerie du Conseil départemental du Finistère